

6 Marivoniĝ ha Fanchiĝ

WAR DON : Kloareg Koat-ar-O'hrannou.
TON DANS AR JUSTINEIEN.

Allegro.



Me 'zo eur zou-dard yaou-ank eus Le-on-ar - Gor-re,



Ga-net war ribl an E-lorn, tost d'ar Me-nez A-re, E



i dis-heol eun i - liz koz hag eur c'hoc'h-di u - hel :



O seurt ne we - lér ne-blec'h war dou - ar Breiz - I - zel.

DISKAN

O, ra, la, la, la, lénig! ra, la, la, la dèno!
Lanlénig, tra, la, la, lal! O, ra, la, lanlèno!

2

Marivoniĝ 'zo eur verc'h hag he deus bleo peurzu,
Daoulagad yell-alaouret, am laka war va zu;
He divoc'h boukik o deus liou bleuñ an avalenn,
He muzellou 'zo rusoc'h eged' eur gerezenn.

3

Marivoniĝ, va dous koant, lilienn bro-Leon,
Likit ho tornig em dorn, ho penn war va c'halon,
Ho lioujed ouz va diweuz, ho sellou flour em re,
Ha touomp beza bepret gwir an eil d'egile.

4

Rouanez ar prajeier, ar brug hag an dero,
Al lann, ar spèrn, ar c'helvez, ar balan, ar bezo
Hag holl ar gwezigoù lus, pa dremenemp ebiou,
Da zemata va mestrez a stoue o femou.

5

Santez Anna, Sant Herve, Sant Kadog, Sant Sulio,
Sant Gweznoù ha Sant Iltud ha c'houi Sant Tivizio,
Me ho ped a-greiz kalon, eus lein ho paradoz,
War an hini a garan da skuilha ho pennoz.

Ab-Sulio.